

Fiseleed

Groñvel

Pennadou bugale  
Kelempouriez  
Pennadou a beb seurt.

Embannet gant A. MERSER. Skol laik ar bostred. Groñvel. Bro-Gerne.  
Psc 1070.

FISELED GRONVEL Nn 12 Miz kerzu I 961

Embannet gant A. MERSER. Skol Laik ar baotred. Gronvel (Kerne Uhel).

Koumanant evid 12 niverenn : 2 skoed ponner da gas da :

LE MERCIER KRP 1819 42 Roazon.

### DISKLERIADUR

FISELED GRONVEL a zo bet anezi da gentañ eur gelaouenn vugale, savet hervez teknikou Freinet, ha netra ken. Tamm ha tamm ez eo bet staget pennadoù kelennoù, hag ivez ar bajenn "A-dreuz lenn".

Lakaad a ra ar bajenn-se meur a hini da skrijal. Petra 'fell deoh ? N'hellom ket, en Emzao, soñjal oll er memez mod. N'eus ket euz an Emzao eur "gevredigez a gengourhemennou kaloneg". Lavared a ran pezh a soñjan, hag e kav din e skrivan pezh a soñj eun darn vraz euz ar re a stourm evid d'iverenn ar Brezoneg. N'eo ket ma c'hoant feuka den ebed. Gwelloc'h eo diskleria penn da benn ar pezh a soñjer eged chom mouzet en e gorn.

Meur a hini, a-du gant ma menozioù, pe a-eneb, en-eus kaset din e goumanant. Med muich a dud a zo, a-du pe a-eneb, n'o-deus ket grêt:

Pe, e tirenkan anezo pa gasan ma helaouenn dezo (pezh a laka ma halon da dridall!)

Pe, ne reont "foultrere kaer"

Pe, e leveront ez eus re a gelaouennou brezoneg.

Memestra, an oll anezo, d'acoust d'o menozioù disheñvel, a vez a-du gant ar Brezoneg.

N'am-eus spi ebed da zistana strizder spered ar re gentañ, nemed e vefe eur burzud. Tud zo a vev en o "loñch" hag e savont speurennoù en-dro.

N'am-eus ket kalz spi kernebeud da lakaad da fiñval ar re ne reont foultrere kaer. Flach diflach ez int !

Med e kav din ez eus tu da lakaad ar re a lavar " ez eus re a gelaouennou brezoneg" da gemm o soñj.

Evidon-me ez eo niver or helaouennou evel eun doare gwrezverker an Emzao. Beo-buhezeg eo, birvill a ra ar menozioù, mad pe fall, ha red ep "disputa" diwar o fenn. Kalz gwelloc'h eo eun Emzao gant re a venozioù eged gant menoz ebed, pe gant unan nemetken.

Kontit ivez an arhant a roit beb sizun evid kelaouennou e galleg! An oll ahanom, e tispignom kalz muich evid lenn galleg eged evid lenn brezoneg.

Setu perag e houlennan diganech -c'hwi hag a lavar ez oh a-du gant ar brezoneg - koumananti d'an oll gelaouennou brezoneg, FISELED GRONVEL en o zouez.

N.B. Evel-just, ma vez roet arhant din gant "Emgleo Breiz", e vo implijet evid lodenn ar vugale nemetken.

A. MERSER.

FISELLED GROMVEL: Nn 13 Miz Genver I 1962

Embannet gant A. MERSER. Skol Leik ar baotred - Gromvel - Bro-Gerne.  
Koumanant bloaz: 2 skeud da gas da A. LE MERCIER GLOMEL GAN  
KRP 1819 42 Roazon.

ar goañv

Erruet eo ar goañv.  
Yen eo an anzer. Anacued e-deus al lapoused bihan.  
Trist eo an anzer.  
Ne welan ket ken an cahl glaz.  
Griz eo bromañ.  
Al lapoused a lars:  
--"Kuik, kuik" Droug am-eus ba ma askellou,  
ne hallan ket nijal.  
Erru eo ma mantell gwenn.  
Ar vilach a zo maro.  
N'eus ket ken den ebed war an hent.  
Ne weler ket ken med bugale war an heñtchou.  
Ar vualh du a gask he boued.  
Ar filiped a ha ba'r harztiou.  
Yen eo. Toud an traou a zo maro.  
Trist eo ar goañv.

Perig VRIAND - 13 vloaz.

MA HAZ BIAN

Me am-eus eur haz bian. Henez a zo briz. Eñ 'n-eus am ebed  
evid hoaz. Eur hoarier ez eus anezañ.

C'hoari a ra ma haz gandtreid ma zad.

D'an noz diwezañ, e klevis eur vouez: "miaou, miaou"

Brigitte a lars din:

--"Ma haz bian a glask e vann."

--"N'eo ket gwir, henez a houl mond e-barz ho kwele."

--"Ne houlan ket e teufe ma haz e-barz ma gwele."

Brigitte a gouskas hoaz.

Ar brud a zihannas.

D'ar mintin, pa oa divunet, henez a deuas da hoari gand lerenn  
ma sah.

Brigitte a gave dezi en em-rê droug. Hi a lars din:

--"Harzit anezañ! harzit anezañ!"

Ma zad a lars dezi:

--"Ne welit ket emañ o hoari?"

Henez a oa skuiz gand e hoari, hag e klaskas unan all.

Eur garotez a gavas, hag e hoarias ganti.

Marie-France a lars:

--"Henez a zo eur hoarier, avad!"

Bendez e hoari gand Brigitte. Jentil eo.

Patricia GORR - 10 vloaz.



Deh da gredistez, Chantal, Jacqueline, Eliane ha me a oa ét d'ar  
barrack da glast plant evid nos d'or nans-diverzen e Korsika.

Bun den a oc war eur biez e troha keuneud, hag e stlape drez  
e-barz an hent. Stoufet e oa an hent.

Chantal a laras:

- "Peseurt mod e rain evid tremen e-barz an hent-se ?"

- "Ouian ket"

Eliane a guias:

- "Me zo chomet staget dez ar bod."

Red e oa tremen dre eur park, mez e oa kezeg e-barz.

Eliane a laras:

- "Me an-eus aon dez ar kezeg."

- "N'ch ket sod ? Fezeg "peus ha ho ti!"

- "Sikour ! sikour!"

C'hoarzin a rên, kenend m'on kuezet e-barz an drez. Roget em-  
oa ma bragou.

Pa oan erruet er gêr, d'an noz, em-  
oa tapet eur vi !

Pierezég KOG - 12 vloaz.

eur vi: eur fustad ( re zo a lavar "eur vilied" )

### EUN DEVEZ TRIST

Glao ra. Me ouian ket peseurt tra d'or. Chom a ran azezet. Ma mamm  
a vroed. Ma diou hoar a hoari. Me a lenn eur lever. Skuiz, e lakan al  
lever en e blas. Me a well dez ma haz kousket war goin ar chiminal. Pa-  
terad a ra heb dihanned.

Me a lakeas ma fri ba tal ar prenestr. Beradennoù groz a gouez war  
andouar.

Me a laras:

- "Peseurt devez eo !"

Me a hadtapas ma lever. Me a zerras ma daoulagad evel ma afen da  
gouesked.

Kleved a ris an etol e kwasad. Me a laras da mamm :

- "Louz eo an amzer. Me zo oblijet da chomet 'barz an ti."

- "Me a ouia ervad!"

Ar glao a zalhas da goueza.

"Peseurt devez trist".

Patricia GORR - 10 vloaz.

### O HOARI BARZ AR GWEZ

Eun devez e laras Norbert din:

- "Dus da hoari e-barz ar gwez em fark!"

Me a zo ét en eur haloupad. Norbert a wignas e-bars eur wezenn.  
Me a zo ét war e lenn.

Me a laras:

- "Emaon e voad d'ober an akrobadi!"

Ni a vrafidgellas. Lampad a ris war eur wezenn all.

Norbert a laras:

- "Se n'eo ket mann ebed d'ober"

Norbert a dapas e elann, a lampas, med e riskas, hag e kuezas

e-barz eur bod drein.

- "Cui cui!" Droug em-eus barh ma feskennou !"

C'hoarzin a ren.

- "O! ne hoarian ket ken!"

Perig VRIAND - 13 vloaz.

Eun huñvre:

AR PEMOH GOUEZ

Dilun da noz, me a huñvreas dezuz eur pemch-gouez.

Me a wele anezañ barz porz ma zi. Hag e oa en em chikanañ gand ma hi.

Me a laras:

- "Kerz kuit, pemch-gouez ! kerz kuit ! tra zroug!"

Hennez a oa deut sa ahanon.

Me a serras an nor war e houg.

Hennez a rê : " roh ! rohi rohi ! ". Me a zalhas da vounta war an ner.

Me a hauchas:

- "Mamm, deut da sikour ahanon! Deut 'ta , mamm."

Hi a deuas. Me a lars dezi :

- "Tapit eur vouhal ! "

Rei a reas anezi din.

Me a roas eun taol bouhal war e benn, hag lahe anezañ.

Distaget em-~~oa~~ e benn diouz e gorr.

Ha war-lerh ma zad en-ca plantet anezañ.

Annaig BON - 10 vloaz.

O chikaned

Eun devaz, e-pad ar vakañsou, e laras Herri din :

- "Dond a rez ganen daderna betrabez?"

- "Ya"

- "Me a zo o vond da droha ar haol dezuz ar betrabez."

- "Nann"

- "Perag ne houlit ket ?"

- "C'hwi a ray ho-cun"

- "e zo vond d'ober."

- "Nann."

Me an-ca kroget. A-greiz toud, Herri en em lakaeas da haloupad war

ma lersh.

Me a grâs denañ :

- "Chom trañkil! chom trañkil!"

Eun tamm war-lerh mamm a oa erruet e-barz ar park.

Hi a lars dins:

- "Serrit ho peg!"

Me a lars dezha:

- "Herri en-aus kroget, ha me a dap toud an tracu!"

Herri a lars dins:

- "Mad eo evidoh!"

Eun tamm war-lerh e cam ét d'ar gêr. Tapet on-oa eur vi, hag e cam ét e-barz ar gwele.

Pierezig KOG - I2 vloaz.

### MA YARIG

Disul e lars mamm dins:

- "Kê da glask eur yarig d'ar Gêrveur."

Benn e oan erruet er Gêrveur, e lars ma yontr din :

- "Petra mch deut d'ober amañ?"

- "Me zo deut da glask eur yar vilhan."

Tapet a reas unan din, hag e lakaas anezi e-barz sañ ma narh-houarn.

Me a yeas war ma giz d'ar gêr.

War an hent e lare ma yarig.

Benn cam erruet ba tal St Negr, e lampas ma yarig méz ma sañ hag e nijas ba'ñ lein.

Me a haloupas war he lersh. Nijal a rê.

Benn ar fin hi a yeas tost ar pont; me a grogas ba he lost. Hi a grâs.

Me a lakaas anezi e-barz ma sañ hag on ét d'ar gêr.

Elinae KEUNEJDER - II vloaz.



### AL LAOUENANIGED

Me an-eus kavet eun neiz e-barz ar gludeg. Uean laouenanig e oa. E-barz ar gludeg ne oa mamm ebed nened ruzh ha sahadou greun. Tri laouenanig a oa en neiz. Erbet e oa gant ur bed ha mon. Hoarvad e teue al laouenaniged da glist greun, rag e leske mamm an nor digoret.

Beb mintin e vezen o vond da weled gant mamm hag e oa an neiz aze beprod.

Eur minbin ne oa mamm ebed ken en neiz.

Marteze e oa bet tapet an tri gant eur paotr droug.

Makaela Vriand - 10 vloaz.

### AN NAER DOUR

Eun devzz e oan et da vale gant Daniel da di Herve.

E-kichen ar hanel e welis eun nêr-dour.

-"Emaon o vond da stlepel eun dra bennag war he fenn!"

-"Diwall 'ta; emañ o vond da flenma ahanout!"

Me a dapas eun tamm koad, hag e taolis anezañ war benn an nêr.

Tebet o-doa Daniel hag Herve rag an aon.

Tebet he-doa ive an nêr.

Yann-Erwan BORN - 10 vloaz.

### AL LAEZ

Eun noz e laras mamm din

-"Ribotad a reot al lêz?"

Evid kregi eh en houar (1), med war-lerh eh en founniz mad.

Mamm a lars :

"Tennit ar golo evid gweled ma n'eo ket friket (2)"

"Oarad ket; me zo 'vond da weled. N'eo ket!"

Ankouet em-oa ar golon hag en-oa stripet al lêz war an daol.

Erget e oa ma zad en ti :

-"Etra 'peus grêt?"

-"Stripet en-eus al lêz dre n'an-oa ket lakêt ar golo."

-"Ma wel mamm an dra-se, e tapet ho traou."

Torchet em-oa an daol ha mamm n'he-doa gouiet mamm ebed.

Annaig Boñ - 10 vloaz.

(1) houar : goustadig

(2) irikets: irika a ra al lêz pa vez arne; eun doare lêz-rousin a ra evel ar maillonez treñket.

### EUN ABARDAEZ BRAO

Eun abardaez e oa deut Patricia du-mañ.

-"Patricia, mamm he-deus laret din da vond da weled an tan ba'r sâ, lerh 'ma Pierig o kousked."

Deut e oa Patricia ganin da weled. Hi a hoarzas, hag e tivunas Pierig.

Patricia ha me zo 'n em lakaet war or hov, war ar plañchoù evli ne welfe ket Pierig ahanon.

Ar babig en-oa falkzet Patrioia o hoarzin. hag en em lakeas da ouela.  
Me a dapas anezafi hag hel lakeas e-barz e houpala.  
C'hoarzet en-eus.

Mikaela Vriand -- 10 vloaz.  
(Reizet eo bet ar pennad-se, an II a viz da, dirag eun hanter kant  
bennag a vistri-skol).

Ma goulmenn wenn

Deh em-oa prenet eur goulmenn wenn ba ti Kadig.  
Mê am-eus lakeat anezi gand ar re all.  
En em ganna a reas an hini wenn gand an hini zu.  
Pa 'z eo ét an hini wenn da zebri, e oe dreset gand an hini griz.  
--"Grou, grou, grou" a rént.  
Plijadur am-oa o selled oute.  
D'an noz e oan ét daveled. Kouked a rént.  
D'ar vintin e oa renket an hini wenn gand ar re all.  
Lacuen e oan.  
Laret em-oa da mamm n'en em gannfent ket ken.

Perig VRIAND -- 13 vloaz.

Kavet 'm-eus eun dra bennag

Deh, Michelle a lars din;  
--"Deut; mamm n'emañ ket ba'r gêr; ni zo vond da glask traou war lein  
an armell!"  
--"O ya, ma'z peus hoant!"  
Ni a lakeas eur gador war lein an daol ba tal an armel.  
Michelle a oa ét war lein ar gador. Hi a lars din;  
--"Sell petra 'm-eus kavet!"  
--"Se zo mamm ebed."  
Michelle he-doa kavet eur maskl.  
--"Deut da ma fles, me a wel eun dra bennag ha n'hellan ket taped ane-  
zañ."  
Me abignas e ples Michelle, hag e tennis eur maskl.  
--"Maskl Pierig an hini eo."  
Me a lakeas anezañ ba e bles.  
Michelle a lars :  
--"Pescourt tra on-eus kavet !"

Patricia GORR -- 10 vloaz.

MA HONIFL

Eun devez e lars mamm din;  
--"Emañ eur honifl o vond da vervel. Lak anezañ dindan eur hached evlô  
na vo ket asamez gand ar re all."  
--"Ya"  
Ma hi oa distaget ha 'n-oa gwelet ma honifl.  
Bet e oan pt kuit. Ma hi a lakeas e bac da dremen dre doull ar hached.  
Lahet 'n-oa ma honifl gand eun tapô troad.

Daniela GOV -- 10 vloaz.



B A R Z O N E G O U

gand A. LAVANANT

"PRIGOURIEN" ENEZ-SUN

-"Prigourien re prozegeñion ?

Piou a car ouz an daou bez mên

Savet uhel en lhez Sun .

War-lerh Ker Iz, chomet dihun ?

Piou en amzer pell dremenet ,

Bremañ a zo meur a gantved ,

Eur wech erru e penn ar bed ,

Gand o hredenn , zalhas bepred ?

-An daou vên-hir a zo chomet

Da desteni d'an oll Gelted .

EVID DIHUN KER-IZ

En noz oa bet Ker-Iz beuziet ,

Heb dor nag alhwez, Enez Sun ,

Evel a-raog chomas, dihun ;

Med he hoar , mui , ne welas ket.

Heb dor nag alhwez, Enez Sun

Evel a-raog chomas dihun .

Dahud, troit kein 'ta d'ar fall

Ma echuo Morgan yudal


Ha ma hello kloh ho "tihun"

Bralla gand hini, Enez Sun.

MERH AR MELINER

Dastumet gant

Yann Poëns



e a zo merh d'eur meliner Pam bi ba ri, Pam bi ba ri ba rè no

e a zo merh d'eur meliner, zo savet mad ha dibreder

e a zo merh d'eur meliner  
Pam bibari, pam bibaribarèno  
e a zo merh d'eur meliner  
Zo savet mad ha dibreder

Plouza dezan e votou koad  
'Vid sonjal bezañ erru mad

Hag a zo savet ken mignon...  
Ken na debren zoub an onion

Pa ran-me krampouez a wechou  
Eñ a zebr toud ar begenou

Med bremañ debr hag a gav mad  
Eun diou pe eun teir skudellad

Pa fritañ eun dousenn viou  
Eñ a zebro de ha me daou

e soje din pa zimefen  
Biken taol labour ne rafen

Pa lakan-me kig barz ar pod  
Me 'm bez an askorn 'vid ma lod

ed skuba 'n ti ha terri kraon  
Gwalhi ma daou dorrig o daou

Berhed yaouank da zimezi  
Tostait ma ho kelennin

ed bremañ me rank ober c'hoaz  
Pilad ar lann gand ma zreid noaz

Me gemerit ket eur chouchet  
'Re ze vez aroug euz ar merhed

Seval diou teir eur raog an deiz  
Galc ma gwaz en e wele

Me gemerit eun den 'feson mad  
Hag ivez kont da labourad

Bale goustadig dre an ti  
Gand an aon d'e zihuni

## A N O A R R O Z I G

Gwechall-goz e oa eur vro, kaer-kenañ, ma veve eüruz-tre ar sujidi omni. Ar Roue en-doa eur verh, anvet Rozig, koant meurbed, ruz he dremm evel eur gerezem, karantezuz e-keñver he zud ha medelezuz evid an oll.

Abaoe he yacuankiz, e veze dalhmad en he hichenn eur hornandig he-doa saveteet eun devez ma oa bet paket hemañ en eun trap da dapoud lern.

Eüruz e hañvale bezañ ar hornandon hag e servije e vestrez gand kalz doujañs. Aliez ez eent da vale war-droad pe war-varh ha, bep gwech, e teue gante bokedou bleunioù gouez a blije dreist da verh ar Roue.

Louarnig, ar hornandon, a gutuille muiañ ma helle aneze: war ar kleuziou, e-touez ar brouskoadou, e-mesk ar spern hag an drez. Ez e oa dezañ en em silañ dre-oll en abeg d'e vent ha d'e ampartiz.

Baleadennou plijuz a reent eta, o-daou, pa veze brao an amzer. An dud diwar ar mêz a chome souezet o welcud Rozig, merh ar Roue ken eeun ha ken seder en o zouez. Siwaz! ne oa ket laouen oll dud ar vro. Nepell diouz palez ar Roue e veve, en eur hao don ha teñval, eur sorserez anvet Luchig en askont ma selle atao gand korn he lagad. Homañ a oa devet he halon gand ar warizi a-enep ar hornandon, rag e oa bet divennet dezi kantren an-dro d'ar palez, kemend a zroug he-doa greet beteg neuze.

Toui a reas ober poan d'an daou vignon ha c'hoari troiou kamm diwar o houst.

Eun endervez, p'edo Rozig ha Louarnig en eur wenodenn striz, ma oa drez ha strouez e beb seurt war ar kleuziou a beb kostez, ez atizas Luchig an oll blantennou brouduz a ree o annez eno; ar spern, an drez, an agroaz a oa niveruz-kenañ. Lavatoud a reas deze en em stlepel war verh ar Roue ha, da gentañ oll, war ar hornandon milliget.

Pa erruas an daou-mañ el leh ma oa stank ar strouez, e skoas ar plantennou brouduz warne. Grennet ha goleet e oe ar vignoned gand skourrou a beb seurt. Darn aneze a oa hir hag-est, darn all a oa berr ha



kalet.

Rozig a oa dalhet he bleo melon ha redelleg gand mil broud; he daouarn a oa skrabet; diwadañ a ree he dremmig koant.

Ar hornandon, eñ, ne veze gwelet netra anezañ; ne oa ket evid ober eur fiñv, zoken; gamni a ree a-bouez-penn rag e oa dihalluz dezafañ savetei e vestrez.

Tra m'edont evelse paket evel pesked en eur roued, Luchig, ar sorserez, pintet war ar hleuz, a hoarze goap muiañ ma helle. Dañsal a ree gand eul levenez diaouleg : "Hañ! hañ! - emezi d'heh enebour-brac eo bezañ mevel dindan merh ar Roue! Lavar dezi bremañ da sachañ aleze!"

Hag hi kuit gand eur hoarzañenn spontuzi!....

Neuze e ce klevet eur vouezig dister e sevel diouz ar brouskoad : "Mez dech, ma hoarezed; mez, rag n'hoh-eus tamm anaoudegez vad ebed. Merh ar Roue a zo anezi eur plah vadelezuz. Plijoud a ree ivez dezi ar bleuniou hag an oll blantennou. Ar hornandon, kennebeud, n'em-deus biskoaz greet droug ouzch! Klenkit 'ta ho proudou, me ho ped; en em renkit ervad er brouskoadou, sioul, ha na selaouit biken ken Luchig, ar sorserez, rag n'ez eus en he halon nened gwarizi, kasoni ha fallentezi!"

Kerkent en em renkas ar spern, an drez, an agroaz a-hed ar hleuziou, o tieubi an daou gêz, ruz o hrohenn gand ar gwad o tiverañ.

- "Piou ? - eme Rozig, en-deus komzet ken flourig-se bremañg?"

- "Me an hini eo - a respontas eur blantenn vihan koant, o tiskouez he bleuniou glan a-uz d'an drez.

- "Ahanta! adaleg an deiz a hizio. evid da hoprañ, e vevi e liorz ar palez gand va bleuniou ar haerrañ!"

Louarnig a gutuillas ar blantenn izeleg ha kaloneg gand kalz aked hag he dougas beteg liorz ar palez ma oa enni bleuniou dispar : tulipez, jenoñl, lili, troiou-hecl hag all. Maget e ce gand al liorz er evel priñsezig ar plantennou. A-benn nebeud anzer, e teuas da gaerraad, he horzern a greskas, he deliou a splannaas; he bleuniou ne oe par ebed deze e nsp leh.

Al liorz er a lavare e hellje brian kaoud bleuniou bravoc hoaz hag a beb seurt liou. Rozig a zeue aliez da weladenni he bleunienn vuiañ-karet gand Louarnig ar hornandon. He diskouez a ree ivez d'he mignonezed gand eul levenez divent :

- "Feseurt ano hoh-eus roet d'ar grouadarez koant-se? - a oe goulennet outi eun devez .

.. ANO ar ROZENN ..

Neuze, hep gortoz e vestrez, e lavars ar hornandon :

"E koun va Rozig karet, ken koant ha ken karanteuz, ez eo bet an-  
vet Rozenn!"

O'hoarzin a reas an oll.

Rozig a zo maro pell'zo, hag ar hornandon ivez. Med ano ar vleu-  
nienn a zo dalhmad beo-buhezeg.

Alan an DIUZET .

mmmmmmmmmmmmmmmmmmmmmmmmmmmmmmmm

wwwwwwwwwwwwwwwwwwwwwwwwwwwwwwww

vvvvvvvvvvvvvvvvvvvvvvvvvvvvvvvvvv

AN NEIZ BRINI

Eur mintin on ét da vale e-barz eur hoad. Me a gavas eun neiz  
brini.

Mond a ris e-barz ar wezenn.

Me a dapas an neiz.

Gloan deved ha reun kezeg a ca e-barz. Dapu re vihan a ca ivez.

Degaset em-ca sneze d'ar gêr, hag em-ca diskouezet aneze da ma mamm.

Mamm a lars din d'o lakaad e-barz eur hached.

Me a roas buzug deze e-barz.

Mikaela Vriand - 10 vloaz.

(8 eurvez brezoneg.)



## GOUSPEROU AN ANAON

N'eus ket kaeroh iliz war an douar eged hini va farrez hinidig, hini ebed, n'eus forz pegen brudet, hag a rafe ken tomm d'ar galon he gweled, puchet m'emañ hi e-kreiz ar beziou, ma lavarfed eur yar o tiwall he laboused bihan.

Da Ouel an Oll-Zent er bloaz-mañ eo bet fellet din mond di da gleved ar gousperou. Allaz! ken pell can bet gand va lein hag oh en em gempenn, ma oant hanteret p'en em gavis er porched.

Leun chek oa an iliz, ha kador huclo ebed. Tud all a oa en o sav e toull an ncr. Bez e hellis koulskoude en em sila e-barz, ha kaoud eur plas da boueza ma daoudroad war an douar.

Digor braz e oa va diousskouarn evid selaou ar brezegenn. Evid an dra-se dreist-oll e can deuet; keit-all oama n'em-oa ket klevet prezeg e brezoneg, ma oa savet naon din. Soñj em-oa nag a fouge e veze ennon gwechall dizrei diouz ar skol evid goueliou an Oll Zent, hag e-pad gousperou an anaon, klevet an Aotrou Person gand komzou êz ha didro ar yez pemdeziog o restaol d'ar barrezioiz bodet en iliz gleur o zud êt diouto, mez dizroet hirio da lida ar gouel-mañ en o hichenn.

Allaz! va naon a oa lezet ganen. Evid an dro genta, edo ar sarmon e galleg. N'eo ket ma kavan ar galleg diêsch eged ar brezoneg da gompren; mez pep tra en-eus e blas, ha ne gave ket din edo plas ar galleg en deiz-mañ hag er barrez-mañ.

Selaou a ris ar frazerrou kenta, ha goude-se ez eas bouzar va diousskouarn, ha va spered a nijas pell diouz bremañ. N'oa ket diêz, rag an iliz, hag an dud, a oa chomet heñvel mad cuz ma 'z edont e amzer va yaouankiz.

Edon o huñvreal en an ofisou niveruz em-oa kanet amañ e brezoneg, pa glevis moueziou o sibilad treg va hein.

Lavarfed e vije bet daou zen o tabutal diwar-benn eun dra bennag hag a rê pcan da unan anezo, rag hemañ a gomze gand eur vouez glemmuz. Egile diouz e du, a responte dezañ dichek a-walh. A-nebeudou, dre ma tomme d'an daou zen, e save uhellou o moueziou, ha me a helle paka geriou frêz: "...brezoneg...galleg...an dud amañ..."

Ne hellis ket mirad a zizrei ma fenn, evid gweled picou 'ta a helle beza chalet gand ar memez tra egedon-me. Pegen souezet e oen, pa welis edont...diou skeudenn, hini Sant Per hag hini Sant Paol, bet sanaillet aze goude m'oa bet kempennet an iliz.

Sant Per en-oa diskroaziet e zivreh diwar e vruched, hag en e zorn dehou hanter zigor edo e alhweziou war var da goueza d'an douar. Paol, en hentrol, a zivenne e damm kig gand nerz hag imor, oh heja dirag Per al heor a oa en e zorn, hag ar poultrenn a nije diwar e vantell.

-Lato, eme Sant Per, evid goud an Oll-Zent, e brezoneg eo...

-Ha perag da houel an Oll-Zent maich eged d'ar gouelicu all? Ar brezoneg a zo echu e amzer. An amzer a za en-dro, an dud a dle mond d'e heul...

Per: Gouel an Oll-Zent a zo disheñvel. Goude an amzer tremenet eo, just. Gouel an anaon, komzet ganto netra nemed brezoneg a-hed o buhez: ne gar ket dit eo teuler eun tammig dismegañs warno, komz diwar o fenn e galle. Paol: Paour-kêz Per! Te zo bet atao eur penn poud. Ne ouezez ket hoaz, an eneo n'o-deus ket ezomm a heriou evid kompren?

Per: Gwir eo n'on ket ken kreñv egedout-te war an teoloji. Mez n'emañ ket bremañ ar poent da zeski din va hatekiz. Eun dra a ouezan ivez, e



Iliz Braz an Aotrou Doue ar re vev hag ar varo n'int dispartiet nemed gand ar maro. Ar re ét d'ar bed all o-deus lezet o yez gand ar re vev, evel eul leve dezo da vevoud. Hag en deiz-mañ emaint unanet oll a spered...

Paol: Amabad eo dit, Per, kinnig d'an dud gwechall menozioù diwanet e empenn eur vadedig tua desket. Ne reent ket kalz a forz euz o yez. Meur a hini a vije bet lozh enañ, n'en-dije gouezet e vije bet grêt kañv dezañ e galleg, daoust dezañ da gompren koulz lavared netra.

Ha neuze ar brezegenn-mañ, grêt ma 'z eo diwar-benn ar re varo, a zo displeget da dud vev an amzer vremañ, hag a oar ar galleg oll.

Per: Oll nemed unan.

Paol: Hag henez unan koz, saveteet e ene pell 'zo, n'en-eus ezomm prezegenn ebed. Re all zo, ha ne ouezont nemed galleg: ar vugale...

Per: Hopala, Paol, amañ e sachan war da argeñloù. Te ive a zo troet da gredi peb tra a vez moulet brao diwar-benn ar vugale ha ne ouezont ket a vrezoneg. Me a zo bet tehet meur a dro diouz an toull pou poul-trenn-mañ, bez on bet e-touez an dud o kemered an êr vad, hag e ouezan mad ar vugale a oar brezoneg.

Ha goude ma ne ouezfent ket, eur sarmon grêt d'an dud vraz, e yez pe yez, ne lavar grik ebed dezo...

Paol: eo, eo, eur gerig bennag a gouez en o diou-skouarn...

Per: Amzer a-walh a jom, e-pad ar vest euz ar bloaz, da garga o diou-skouarn gand galleg. Ar sarmon-mañ a zo grêt evid ar re vraz.

Paol: Hag ar re vraz a zo bugale anezo ive, Per. Red eo delher soñj euz an dra-se. An dud diwar ar mêt bremañ o-deus mez pa vez komzet dezo e brezoneg. Stanka a rafent o diou-skouarn da gomzou ar beleg, ma vefent e brezoneg...

Per: Set neuze, d'ar beleg eo senti euz pep avelenn a dro e penn e barrezioniz ?

Paol: Ar beleg a dle klask an hent distro da vond beteg ene e barrezioniz. Ma ne deu ket a-benn gand eur yez, etle kemered unan all.

Per: Selaou, Paol. P'edon-ni o vale gand ar Mestr war heñchoù ar Jude, e komzedeom en or yez, an Arameeg, daoust n'o-dije an darn vrasa euz an dud ententet mad ar gresianeg. Ha me lavar dit, ar homzou-se a zanke don er galon. Evid an dud a zo amañ, ar galleg n'eo nemed eur yez estren desket mad, yez o spered marteze. Mez yez o ene a zo atao ar brezoneg. E brezoneg int bet savet, e brezoneg e labouront, kantikou, pedennou, prezegennou brezoneg o-deus karget peb korn an iliz-mañ ha flouret peb mêt ha peb skeudenn e-goug kantvejou.

Paol: Komzou brao a deu ganit avad bremañ. Mez pa lavaran dit e stankfent o diou-skouarn...

Per: 'Lato e hellont kemered eun tammig poan d'odigeri ! W'eo ket kalz a dra gouenn diganto lezel a gostez ar hiz hag o froudennou evid kleved mouez Doue.

Paol: Ne gav ket din ne vije nemed eur hiz hag eur froudenn evito. Klevet em-eus paotred ha merhed yaouank o lavared, ar prezegennou brezoneg n'ez eus enno nemed radotachou koz ha kleuz; estreged ar prezegennou galleg a zo leun ha lemm.

Per: O ya ! D'ar veleien eo da genta poania.

Paol: Pegen diêz eo dezo ! O danvez prezegenn a deu dezo dre al levrioù galleg a lennont.

Per: Penaoz 'ta neuze e rê beleien Roum p'o-doa da zisplega d'ar Romaned da lizeri skrivet e Gresianeg ? Kaoud a ra dit oa a-walh

dezo da lenn da lizeri, ken diôz all da gompren, evid beza lakaet war roll ar verzerion ? Ar beleg a die ober e vad euz ar pez a lenn, ha goude-se kemered poan d'e renka e brezoneg frêz evid e barrezionis. Re wir eo, allaz, prezegennoù 'zo n'int nened renkadennou frazernou lakaet stag-ha-stag evid delher an teod da stlakañ e-pad an amzer merket. Mez en eur boania, hag en eur lakaad an dud da boania, e hellfent ober labour vad ha don dre ar brezoneg.

Trouz a zo gand ar galleg en-dro da sîquarniou an dud. Mez e donder o halonoù, e Brezoneg eo e klevont mouez Doue o sibroud dezo e sekrejou kuzet.

Dre ma komze, en-ca Sant Per searas e zorn war e alhweziou. E vouez a oa neruz, e zremm sedereet. Goustadig e kreziyas e zivreh, war e vruched evel m'edont a-raog. Dapulegad Sant Paol a gouezas war an alhweziou, hag e welas ca dezet ar poent dezafñ tevel.

Kregi a reas gouzperou an anaon. Gand al latin n'en em santen ket ken divroet. Ha kannonet oan o soñjal, marteze e jome eul lu-hedenn fizialis hoaz war anzer da zond ar brezoneg, peogwir edo Sant per aze hoaz da zivenn e wir.

PENNGWEIN,

---

S O N E T

Meur a veure lorchuz em-eus gwelet  
O floura kern ar menez gand e lagad a Rowe ,  
O pokad gand diweuz acur d'ar foenneg hiaz ,  
Oh alacuri stêriou gwenn dre strillourañ kerrinuz ;  
Koulskoude e lez ar kourcoul vil da redeg  
gand e grabanou divalc war e zremm duduz ,  
hag e kuz e vizaj dicuz ar bed glaharet ,  
oh en em ruza dre laer euz ar reter d'ar hornog.  
Evel-se eur beure vintin e paves va heol  
Gand splannder an treh war va zal ;  
Mez aallaz ne badas ganin 'med un eurvez  
Kuzet eo din bremañ gand kourcoul an cabl.  
Evitañ koulskoude va harantez a jom heb dismegañs ;  
Heolieu 'r bed hell saotri, pa saotr heol an neñv.

Shakespeare (XXXIII)

(Brezoneg gand Abask)



Ar veleien disuj  
e-pad an Dispah

Eun owerenn guz

Deuet eo an noz, teñval eo an amzer; n'eus den war vale adaleg Beg Miliaio beteg enezenn Vriad, o vont dreist boung Perroz ha kêr Landreger. Ne gleyer ket zoken en oabl, a-zieh ar penn, kan klemmuz ar heveleg aot, na kalet skil-muz ar mor-bik mareillet. Ne gleyer a-bell, dreist an enezier, nemed gresnol ar mor braz a gros evid lavared ez atao en-dre hag ez eo bepred leun a ners. A-veh eur steredenn en em zispak eur wech an amzer...

En eun taol-kont, etre unng eur hag hanternoz, e kleved, e-kreiz ar mor, eur hloh o seni; dont a ree euz a gostez enezenn Vriad, kêr Bempoull pe Landreger, hag he son a yee a-hed an aot. Chom a ree pennadou, evel da ehana, dirag ar Porz-gwenn, Treleven ha dirag Louan-neg. Tremen a ree Perroz, hag ez eo dreist Beg ar Hastell hag ar Sklêder warzê Trebeurden, ha n'on dare da beleh. en eurseni atao eur wech an amzer hag o chom eur pennadig dirag peb kêriad-tiez. Taolieu ar hloh-se, e-kreiz an noz, a oa evel klemmou an anaon da gleved...

A-benn eur pennad, e kleved dirag boung ha mad Perroz, a-rez enezenn Rouzig, a-gleiz pe a-zehou, hervez ma e'hweze an avel, eur hloh all pe ar memez hini narteze. Ne cufen ket evid her lavared dech, o seni adarre; mez bremañ ne oa ket er memez tra. Kentoc'h ne sone nemed taol bremañ, tal e-veuc, zoken dirag ar kêriou na chome evel da ehana dirazo, ha bremañ e sko stank e daolieu, beteg c'hweh pe seiz taol dioustu, an eil war-berh egile.

A-barz nebeud, euz al leh na sone an taolieu-se, e weled o sevel euz a-rez ar mor beteg tregont pe daou-ugent treetad en êr, eur c'houlaouenn vraz, pe evid lavared gwel, eur voull-dou, hag a lugarne en eur drei hag en eur zistrei, a bep tra, a-gleiz hag a-zehou, atao war-zu an douar, evel p'he-dije c'hoant da furcha kemenê toull kuz a oa er herreg... Ar sklerijenn-se ne bade ket pell; mond a ree kuit, ha prest goude ar hloh a sone adarre, ha neuze ne gleved nemed son ar hloh e-kreis trous ar billennou a ruille hag a ziruille diwar an eil roh war eben. Goude-se e weled adarre o sevel en êr hag o tiskenn kêr buan, ar c'houlaouenn vraz; ha pa vije eet ar sklerijenn kuit ar hloh a sone adarre. Teir pe beder gwech e c'hoarveze an dra-se, sklerijenn ar c'houlaouenn ha son ar hloh, ren hini d'e dro. A-benn eun eur, pe war-dro, ar hloh a yee da vad hag ar sklerijenn da netra.

Neuze e weled o tispaka a bep kogn a oa en aot, hag o bistaga diouh an douar vraz, bag ar karget a wazed, a verhed hag a vugale zoken. Mond a reent da gleved an owerenn a lavare evito, e-kreiz ar mor, pa n'oa ket evid henn ober war an douar braz, eur beleg chomet en o zouez. Dont a ree bagou, a bep korn ar vro, adaleg stêr Landreger beteg beg Trebeurden... Mond a reent war-zu enezenn Rouzig, d'al leh ma oa gwelet ar sklerijenn.

Eno e kavent eur vag pontet... War-zu ar vag vraz-se e teue bagou euz a gement porz-mor bian a oa en aot. Taoler a reent o eor en-dro dezi, evid chom en he hichêrn; ar re vianna en em stage outl. War bont ar vag vraz ez eus savet, gant lien-gouel, evel pa lavarfen



- Istor -

dech, eun tiig bihan. E-kreiz ez eus eun daol holoet gand lien gwenn-kann, hag e pep penn eur c'houlac'henn goar war elun. Kerkent e weler eur beleg o waska e zillad da owerenna...

Ar bagou a horjelle hag a vrasiskelle; a save hag a ziskenne, pep hini d'he zro, gand ar gwagonnour. Lod a ree van da vond d'ar goueled, lod all a bigne war gem ar c'hounnou-mor; a-wechou diou vag, harp-ouh-harp, n'en em welent ket zoken, ha koulskoude ar han hag an diskan a yee a-unan pep hini d'he boent...

A-barz an deiz, pep hini a zo distro d'he gêr; n'eus nemed ar beleg paour ne oar da beleh mond, rag n'en-deus kêr ebed. En eur ziskenn euz e vag, e ranko klevet peleh emañ ar hlask dezaf evid gelloud mond en tu all, el leh ma ne vezo ket klasket.

Hervez LAN INIZAN (Engann Kergidu).

Ar person intru

...beleien o-doa greet al le, pe ma kavit gwell o-doa greet sermant... Ar veleien a ree al le a oa hanvet beleien intru, abalamour mah en em lakeent da berson pe da gare, e parrezioù, heb beza hanvet gand ar gwir eskob. -- E broiou all e vezent hanvet asermantet...

Ar beleg intru a oa e Plouared a oa e hano Loull ar Bouc'h..Den ne dae war-dro an iliz...

Lan Inizan (Engann Kergidu)

Ar veleien disant

Tud ar vro n'en em chalont ket gand ar rouanez, na gand an noblañs; fae a reont war ar veleien intru; n'eus kouer ebed ha ne rafe ket deg leo war droad e-pad an noz, ha d'and an arner, evid mond da gaoud eur beleg disant, evid degemer e vennoz, evid rei arhant ha boued dezaf. Kuzet e vez ar veleien-se er hoajou, e tier-soul, pell-pell.

CAMBRY (Beaj er Finister -1794)

Sioul-kenañ o-deus bevot ar veleien intru e Pont-E-Kroaz.  
(idem)

Ar veleien, a-raog an Dispah, a oa, tost da vad, azeulet evel doueed. Ar pezh a dremen bremañ a ziskouez dim peseurt levenon eo o hini. Dre vraz, n'o-deus ket kouz ar beizanted, na d'ar roue, na d'an noblañsou, ned o-deus gouelet p'o-deus kollet o fastered. Ha peseurt joa o-deus het pa'z int bet daskoret dezaf? Adkavet o-doa o skor. Eet eo o zristidigez da get, hag o-deus santet o halonegez oh adnenel.

(Cambry)

- ISTOR -

KAN AR BOEL

(Kan etrevroadel)

War sac, labourer dismegañset !  
War sac, c'hwi oll dud a boan !  
Ar wirionez a zo dirollet .  
Trouz a ra ar hofou mean.  
Dilezom an amzer dremenet  
Sklavcurien gêz. war-sao bremañ!  
Ganim eur bed all a vo krouet;  
Ne oam netra. renom bremañ !

Peizanted ha michercurien,  
Ennom-ni emañ an danvez!  
An douar n'eo ket d'ar binvidien;  
Foei war an dud didalvez !  
Diwarnom eo emaint o veveañ,  
Evel brini ha sparfelled.  
Eun devez e vo red o skubañ.  
An heol a lugerno bepred !

Diskan (Diou wech)

Deut eo ar stourm diwezañ  
Warhoaz oll unanet  
E-leh en am lazañ  
Ni a vo mignoned !

Troidigez gand Alan an DIUZET.

Pez a soñje, e I 877, eur Roueeler diwar micherourien-gêr

"Er hêriou, ar vicherourien ne labouront nemed pevar pe pemp devez er zizun. Da zul, e-leh mond d'an overenn da bedi Doue, ez eont d'an ostaleriou da eva ha d'en vezvi. Da lun e rannont beza mezo adarre, abalamour ma'z oant bet mezo en devez a-racg, mechañs. A-wechou d'ar meurz vintin e chomer er gwele da zistana. Aliez, pa vez greet ar pae d'ar sadorn, e chomer hoaz eun hanter devez heb ober netra, evid beza prest da ober eur hovad d'ar sul. A-benn ma vez greet, er hizse, daou pe dri devez eva, e vez eet gonedigez ar sizun, pe war-dro; hag evelato er gêr eus tad ha mamm, gwreg ha bugale hag a houlen ivez eun tamm bara. O hlenmou a laka a-wechou diêz penn ar micherour, mez ne viron ket outañ avad da ober ar memez tra ar sizun war-lerh.

.....

C'hoant en-deus da gaoud chervad hag arhant en e hodell; n'en-deus ket, rag evet en-deus e honedigez. Abalamour da se nes ell nemed gand kasoni ouz ar re o-deus eun dra bennag, oh ar re a vev en o êz. Eñ ivez, ma karje beza bet eun tammig bihan piz, en-doa bremañ dastumet eur gwennegig bennag; mez, siwaz! korv a houneze hag e korv ez ee.

Abalamour ma n'en-eus netra, micherour kêr en em lak atao e kostez ar re fall. ...Ma ne gav ket deoh eo gwir kement-mañ, n'oh-eus nemed taoler evez cuh ar peza a c'hoarvez er hêriou pa vez elektionou. Daoust ha ne vez ket atao ar vicherourien e kostez ar re fall? Daoust ha c'hwi oh-eus biskoaz o gwelet, en eur gêr bennag, o vond a-du gand an hini a zo douget gand an dud vad, me lavar gand an dud a gar Doue, o bro hag o Roue? Nann, e nep leh. Micherour kêr hag an den a relijion a zo evel ki ha kaz.

.....

Ni, micherourien diwar ar mêz, a labour a-greiz kalon a-hed ar sizun; ha pa hellom kasud daou wennegad da sul, eo brao deom. Ni a labour er gwel da Zoue, a hounid bara deom ha d'or bugale, hag, el leh en em sevela-eneb ar re vad hag ar re binvidig, e leverom bennoz Doue dezo da veza roet deom labour, ha, dre al labour, boued d'on tud.



BEAJ ar GERIOU  
euz mizellou ar Vrezonegerien  
a-ziwar ar miz  
beteg diweuz ar Vrezonegerien desket

gand

ABASK.

Bez ez eus gerioù boutin ( ha "boutin" a zo eun all)  
implijet, a gav din, gand eur stêr disheñvel gand an dud desket.  
Lenn a ran "abeg" evid "raison". Du-mañ, "abeg" a zo "critique,  
noise" : "Klask abeg ouz unan bennag, pe en eun dra bennag".  
"Boutin" a zo "en commun, en partage" (eun dornerez a zo boutin  
etre pemp tiegez).

"Kerse eo ganin" " je suis déçu, désolé". Du-mañ e vez lavaret  
" kerse em-eus da...d'an amzer dremenet" " je regrette le temps  
passé; pe ive " kerse gavan dezafñ " " il me manque" - mez "keuz  
em-eus d'am fehejou" " je regrette mes péchés" ( kerse 'm-eus d'am  
fehejou, a vije : je regrette de ne plus pouvoir pécher!).

Marteze e talvezfe ar boan sevel eun enklask war seurt traou ?  
Tud ar ZH a zo troet da ober goap ouz ar plouk hag a ra fae war  
ar pezh ne anavez ket var zigarez ma " vez ket laret mo-se, du-mañ".  
Me , siwaz, a zo unan euz ar blouked-se; ne gavan buhez, e gwirionez.  
nemed er yez em-eus klevet p'edon bihan. Daoust ma ' z on prest da  
anzao ez on beirwelet war ar poent-se, em-eus aon paotred desket  
a zo a zall re dost d'eur "brezoneg boutin" ha n'eo komzet gand den  
ebed; brao hoaz pa n'eo ket e brezoneg eun tamm "dekaikomani" diwar  
ar galleg.

Da skwer, kemend-mañ moulet war Ar Bed Keltieg (miz here) (Boda-  
deg Pondivi )

" da bledifñ gant ludennoù arboellerezhel ha kevredigezhel Breizh..."  
"Aozadurioù micherel, sindikadel ha sevenadurel..."  
"O tezvarn eo berzh mat al labour douar a ra berzh-mat holl renkadoù  
micherel ha kevredigezhel ar rannvro..."  
"A vez n'eus ket bet c'hoazh sevenet e doare ebet an darbaroù a-zi-  
forc'h..."

"..un divroadeg, he fennaleg skortted anat ar skoazell-Stad war an  
tachennoù arboellerezhel, kevredigezhel ha sevenadurel;  
"A c'houlenn start...ombannidigezh al lezennerektres evit diorren  
gant urzh holl oberennoù Breizh..." hag all..."

Mad, lakom e vije embannet ar pennad-se dre Vreiz : lavarit din  
'ta red den a vefe gouest da gompren eur frazenn ? 500, marteze, war  
900 000 !

An abeg a gavan e seurt troidigezioù ger evid ger, eo ma n'eo-deus  
ket an droerien merzet eo ijin ar yez vrezoneg disheñvel euz din  
ar galleg. Kaoud a ra din ( fazia a ran ? ) ne ra ket ar brezoneg  
kemend gand amou-gwan eged ar galleg : setu ma vije red bras  
durioù micherel, sindikadel ha sevenadurel " en eun doare all, ma 'z  
eus hoant e vije ar frazenn brezoneg korv hag ene.

- YBEADUR -

"Paotred Kerlouan, o boned glaz war o fenn, o bleo hir pleget a-zindannañ, hag o horn-butun en e ouer, a hoarze ken na dregerne al leur-gêr ganto."

"War bord ar mor, e pep ti peurvuia, e vez eur fusil evid tenna, e-pad ar goañv, war an houldi gouez a deu, euz ar mor don, da glask o zamm boued war an douar."

(Lan INIZAN - Engann Kergidu)

"Meret hoh-eus-hu bet, eur wech bennag, gand ho taouarn, o hervou (d'ar morgazed) diaskorn, gwak ha gwevn, ken nerzuz ? Ha kroget o-deus ennoch gand o beg du, kaled evel dir, lemm evel eun aotern ? Labezet oh-hu bet gand o liva, ken du hag huzil ar siminal ?"

(Fanch al LAE - Bilzig)

"Daou anezo a bakas krog en e zaouarn, re all a vouhtas pe a sachas warnañ, ha setu ar hemener en o heih ha lakaet da drei ha da zañsal ganto ."

(An UHEL)

KENTEL 23

Ar hemmadurioù war-lezh AM, EM

"Eur bloavez, em-oa lojet, em huziadenn, pemzeg aval dous mad "

(Breizadig)

"Ar skritur a oa war an houarn ? Nao zach ! hag o-nao int eet em penn"

(Jakez Riou -Alanig al Douarn)

"Dond a ris da gaoud acn, nann abalamour din va-unan, mez abalamour d'am houmpet Herve Soutre, abalamour d'e bried, ha d'o daou vugel "

(Lan Inizan-Engann Kergidu)

"Evidoh da veza dindan an douar, e rê avel-dre e foñs ar puñs, hag e oen, n'eo ket êz gouzoud pegent, oh esa kaoud sklerijenn; an avel-dre a vire ouh an tan da gregi em fennad goulou "

(Engann Kergidu)

"Ha roet 'peus al lizer d'am zad ?"

"Deuit em zi, me ho ped "

→ YEZADUR -

Sell mañ ouz ar pennadou-se :

war lersh AM hag EM, e vez grêt bepred ar hemmaduriou K/H ha T/Z,  
ha ral a wech an hini P/F .

KENTEL 29

Ar hemmaduriou war-lerh OR

I/ ON,OL : Gweled ar gentel 26.

"Kluchet e oa on ti en eun drac'hienn leun a vleuniou "

"Serret on-eus ol lamm a-bez"

2/ OR

P'hen gwelas o vond 'raog

Evel-se 'n eur grenañ

E laoskas or hillog

Bur c'hoarz-gcap c'houez kenañ.

(Ernod)

War-lerh OR e vez grêt ar hemmadur K/H, hag hennez nemetken.

3/ E Bro-Dreger, e vez grêt bepred gand ON, hag ar hemmaduriou-fri

war e lersh :

On hillog

On zi

On fenn.

Ni droho krenn on zeod 'n on beg,

Hag a skuillo on gwad a-leiz,

Kent 'ged dinah ar Brezneg,

Rag te, yez koz, eo buhez Breiz.

Evidon lar hag a laro :

Keit ma lammo kalon em hreiz,

Yez ma zud koz, me az karo,

Rag te, yez koz, eo buhez Breiz. (An Uhel)

Ni on-bo kalz a vevelien,

En-dro d'on zi, ha mitizien (An Uhel)

M'on-eus netra d'ober, ma den,...

Nemed plega on fenn, ha labourad bepred.... (An Uhel)



AR ROUE PER

hag

AR HOUER

Ar Roue Per a dremene dre eur head, hag e welas eur houer. Ar houer a oa o faouti keuneud. Ar Roue a lavaras dezafñ :

—" Demad, tad koz. Eur famill vraz az-peus ?

—" Diou verh ha daou vab.

—" Neuze n'eo ket braz, da famill. Petra 'rez 'ta diouz da arhant ?

—" Da genta, e paeon va die; d'an eil, e prestan d'ar re all ; d'an trede e taolan arhant en dour .

Ar Roue a soñjas: petra e lavar an den-mañ ?

An den koz a zisplegas dezafñ :

—" Paea a ran va die, da lavared eo e roan boued d'am zad ha d'am mamm en o hozni; presta a ran, e sevel mibien din; ha teuler a ran d'an dour, rag merhed a savan ivez.

—" Hañ, eme ar Roue, gwelad a ran n'eo ket goullo da benn. Elein ahanon bremañ er-mêz euz ar head, rag ne gavan ket an hent.

—" Perag e vleinfen -me ahanout ? N'em-eus ket a amzer da goll. Klask da hent hebdon. Kê war eeun, ha goude-se tro a-zehou, hag a-gleiz, hag a-zehou adarre.

—" Ne gomprenan netra, eme ar Roue. Deus ganen, hag e paein ahanout.

—" Neuze 'vad emeon dech. Deon.

Ar houer a azezas e bwetar ar Roue, ha dao en hent. Goulenn a ra ar Roue :

—" Ha gwelet az-peus bet ar Roue ?

—" N'em-eus ket, nann. Mez heant braz am-eus.

—" Neuze, digor da zaoulagad. P'en em gwi e kêr, e weli ar Roue.

—" Ha penaoz eh anavezin anezafñ ?

—" An oll en-dro dezafñ a vezo diskabell, nemed ar Roue a zalho e dok war e benn.

En em gaoud a reont e kêr. An dud a wel ar Roue hag a denn o zok. Selled a ra ar houer : n'eus nemeto o-daou gand o zok war o fenn.

—" Picu eo ar Roue ? a houlenn ar houer.

—" Unen ahanom-ni, emichañs, eme ar Roue.

Troet diwar ar rusianeg gand ABASK.

## A-DREUZ LENN

BRUD (II-I2): "Eñvor dieptis" Per Denez (Tenrad 6I) a zñ deut da veza eur goulou splann. Nag a blijedur am-eus bet ch adlenn "Bilzig". Sed aze brezoneg, hini beo e erodarez. c'hwez ar hagn gantañ evid tud 'zo siwaz, rag ne ouezint biken petra eo ar yez.

Spered ha boud (Preder 26), gand Berdiaeff. Moullet brao. N'eus ket ahanda eur prederour, ha n'ix ket da varn.

Celtia (I44) hervezi e vefe bet serret skol Bloueg dre an Aotrou a Sant Brieg. Gwir, pe eur gwall-gonz ?

Le Combat socialiste a zahn da embann brezoneg beb sizun, gand or heññañ koadigan.

Ar Vro (II) p1 ...la section la plus active, et de loin (da lared eo ar Zedacherion)

p2 Nen de ket a lareion, mès a Hobérian hum es d'ober.

Kemrom da skwer, kleennadurez ar brezoneg, ar pez a zo, hag a-bell. ar puezusañ evid ar Zedacherion kerkouliz hag evid tud an Enzae.

Ped skol brezoneg (ne gomzan ket euz ar strewi leoriou, med a skol wirion) a zo bet digoret gand tud ar ZH ? Hini ebet, tost da vad. 99.99% euz ar vugale a zesk arbrezoneg, her gra gand an doare skriva reiz. Hag ar skol diwezañ bet digoret, hini ar CEG er Gemene (80 diskibl), renet gand Evenou euz KAVY, a ra gand doare-skriva reiz ar Gwenedeg.

Kavoud a reer e-barz AR VRO eun adembannadur pouezus "Antée, les Bretons et le Socialisme. gand Emile Masson, bet embannet evid ar wech kentañ e 1912 e-barz ar gelaouenn "ERUG".

## Bodadeg EMGLEO BREIZ, en Orient

Roet zo bet an arhant-mañ:

Bilzig.....	600	000L
Leor Tricoire	400	000L
Ar Votez ten.	200	000L
Kan ha diskann	80	000L
Fladenn Tric.	100	000L
Skol B.B. ...	50	000L
Skol Ober....	50	000L
Skol Ar Falz.	50	000L
Fiseled G....	20	000L
Wanig ha W....	20	000L
Evenou.....	10	000L
Bleun B ar vug	20	000L
Parez.....	50	000L
Enon.....	50	000L

Anvet eo bet An Aotrou Tricoire da bennrener. Or gwellañ gourhemennou dezañ. Sur em e va eur rener efedus, gredus, hag a lakalo or yez da vont war-raog.

Yann POUPINOT : Les Bretons à l'heure de l'Europe: N'on ket eun eko-zonikour, ha n'ix ket da varn. Memestra, p 112, 113, 114, 115, 116, 117, 118, 119, 120, 121, 122, 123, 124, 125, 126, 127, 128, 129, 130, 131, 132, 133, 134, 135, 136, 137, 138, 139, 140, 141, 142, 143, 144, 145, 146, 147, 148, 149, 150, 151, 152, 153, 154, 155, 156, 157, 158, 159, 160, 161, 162, 163, 164, 165, 166, 167, 168, 169, 170, 171, 172, 173, 174, 175, 176, 177, 178, 179, 180, 181, 182, 183, 184, 185, 186, 187, 188, 189, 190, 191, 192, 193, 194, 195, 196, 197, 198, 199, 200, 201, 202, 203, 204, 205, 206, 207, 208, 209, 210, 211, 212, 213, 214, 215, 216, 217, 218, 219, 220, 221, 222, 223, 224, 225, 226, 227, 228, 229, 230, 231, 232, 233, 234, 235, 236, 237, 238, 239, 240, 241, 242, 243, 244, 245, 246, 247, 248, 249, 250, 251, 252, 253, 254, 255, 256, 257, 258, 259, 260, 261, 262, 263, 264, 265, 266, 267, 268, 269, 270, 271, 272, 273, 274, 275, 276, 277, 278, 279, 280, 281, 282, 283, 284, 285, 286, 287, 288, 289, 290, 291, 292, 293, 294, 295, 296, 297, 298, 299, 300, 301, 302, 303, 304, 305, 306, 307, 308, 309, 310, 311, 312, 313, 314, 315, 316, 317, 318, 319, 320, 321, 322, 323, 324, 325, 326, 327, 328, 329, 330, 331, 332, 333, 334, 335, 336, 337, 338, 339, 340, 341, 342, 343, 344, 345, 346, 347, 348, 349, 350, 351, 352, 353, 354, 355, 356, 357, 358, 359, 360, 361, 362, 363, 364, 365, 366, 367, 368, 369, 370, 371, 372, 373, 374, 375, 376, 377, 378, 379, 380, 381, 382, 383, 384, 385, 386, 387, 388, 389, 390, 391, 392, 393, 394, 395, 396, 397, 398, 399, 400, 401, 402, 403, 404, 405, 406, 407, 408, 409, 410, 411, 412, 413, 414, 415, 416, 417, 418, 419, 420, 421, 422, 423, 424, 425, 426, 427, 428, 429, 430, 431, 432, 433, 434, 435, 436, 437, 438, 439, 440, 441, 442, 443, 444, 445, 446, 447, 448, 449, 450, 451, 452, 453, 454, 455, 456, 457, 458, 459, 460, 461, 462, 463, 464, 465, 466, 467, 468, 469, 470, 471, 472, 473, 474, 475, 476, 477, 478, 479, 480, 481, 482, 483, 484, 485, 486, 487, 488, 489, 490, 491, 492, 493, 494, 495, 496, 497, 498, 499, 500, 501, 502, 503, 504, 505, 506, 507, 508, 509, 510, 511, 512, 513, 514, 515, 516, 517, 518, 519, 520, 521, 522, 523, 524, 525, 526, 527, 528, 529, 530, 531, 532, 533, 534, 535, 536, 537, 538, 539, 540, 541, 542, 543, 544, 545, 546, 547, 548, 549, 550, 551, 552, 553, 554, 555, 556, 557, 558, 559, 560, 561, 562, 563, 564, 565, 566, 567, 568, 569, 570, 571, 572, 573, 574, 575, 576, 577, 578, 579, 580, 581, 582, 583, 584, 585, 586, 587, 588, 589, 590, 591, 592, 593, 594, 595, 596, 597, 598, 599, 600, 601, 602, 603, 604, 605, 606, 607, 608, 609, 610, 611, 612, 613, 614, 615, 616, 617, 618, 619, 620, 621, 622, 623, 624, 625, 626, 627, 628, 629, 630, 631, 632, 633, 634, 635, 636, 637, 638, 639, 640, 641, 642, 643, 644, 645, 646, 647, 648, 649, 650, 651, 652, 653, 654, 655, 656, 657, 658, 659, 660, 661, 662, 663, 664, 665, 666, 667, 668, 669, 670, 671, 672, 673, 674, 675, 676, 677, 678, 679, 680, 681, 682, 683, 684, 685, 686, 687, 688, 689, 690, 691, 692, 693, 694, 695, 696, 697, 698, 699, 700, 701, 702, 703, 704, 705, 706, 707, 708, 709, 710, 711, 712, 713, 714, 715, 716, 717, 718, 719, 720, 721, 722, 723, 724, 725, 726, 727, 728, 729, 730, 731, 732, 733, 734, 735, 736, 737, 738, 739, 740, 741, 742, 743, 744, 745, 746, 747, 748, 749, 750, 751, 752, 753, 754, 755, 756, 757, 758, 759, 760, 761, 762, 763, 764, 765, 766, 767, 768, 769, 770, 771, 772, 773, 774, 775, 776, 777, 778, 779, 780, 781, 782, 783, 784, 785, 786, 787, 788, 789, 790, 791, 792, 793, 794, 795, 796, 797, 798, 799, 800, 801, 802, 803, 804, 805, 806, 807, 808, 809, 810, 811, 812, 813, 814, 815, 816, 817, 818, 819, 820, 821, 822, 823, 824, 825, 826, 827, 828, 829, 830, 831, 832, 833, 834, 835, 836, 837, 838, 839, 840, 841, 842, 843, 844, 845, 846, 847, 848, 849, 850, 851, 852, 853, 854, 855, 856, 857, 858, 859, 860, 861, 862, 863, 864, 865, 866, 867, 868, 869, 870, 871, 872, 873, 874, 875, 876, 877, 878, 879, 880, 881, 882, 883, 884, 885, 886, 887, 888, 889, 890, 891, 892, 893, 894, 895, 896, 897, 898, 899, 900, 901, 902, 903, 904, 905, 906, 907, 908, 909, 910, 911, 912, 913, 914, 915, 916, 917, 918, 919, 920, 921, 922, 923, 924, 925, 926, 927, 928, 929, 930, 931, 932, 933, 934, 935, 936, 937, 938, 939, 940, 941, 942, 943, 944, 945, 946, 947, 948, 949, 950, 951, 952, 953, 954, 955, 956, 957, 958, 959, 960, 961, 962, 963, 964, 965, 966, 967, 968, 969, 970, 971, 972, 973, 974, 975, 976, 977, 978, 979, 980, 981, 982, 983, 984, 985, 986, 987, 988, 989, 990, 991, 992, 993, 994, 995, 996, 997, 998, 999, 1000.

## A-DREUZ LENN

AL LIAMM (nn 88) Eun niverenn dreist. "Alfred" Yeun ar Gow en -eus lakeet ahanon da dremen eun hanter- eurvez euz ar re blijusañ.

"Troiou kaer ar Baron Puzaf", gand Roparz Hemon, a yelo d'ober unan euz or gwellañ leoriou evid ar re yaouank.

Pennad Trollope en-eus degaset din soñj eur vro leh 'm-eus tremenet eun darn euz va bugaleach. Klevet 'm-eus eno tîd koz o komz euz seurt abadennoù o-doa gwelet pa oant yaouank.

Gwannoh ez eo pennad Jil Ewan diwar-benn "Strollad Beilladegou Treger". Perag embann traou evel ar re à lenner p 364 ? Daoust hag e hellfe Jil Ewan lavared dim ped "broadelour" (gand ar ster a ro d'ar gese) ez eus e-touez an dud a ra eur meneg anezo en e bennad, da lared eo an dud a "ziskouez war dachenn an ober", ha n'eo ket war hini ar gomz, "ar pez a soñjont hag ar pez ez int e gwirionez."

Barzoniez e-leiz a gaver e gwerzennoù Maodez Glanndour. Sed amañ hoaz eur varzoneg o-devo plijadur va skolidi o teski anezi.

Lôriou ar vugale (Al Liamm) Mojennoù La Fontaine lakeet e brezoneg gand Paotr Treoure ha Yeun ar Gow ; Kroñenn azen, hervez Perrault, brezoneg gand Per Denez ; Ar kaer hag he givri bihan, hervez Grimm, brezoneg gand Kervella.

Tri leor euz an dibab evid ar vugale. Siwaz, en abeg d'o doare-skriva direiz, e vint lennet d'ar muiañ gand eun hanter-kant bennag a vugale, tra ma hellfent bezañ strewet a-viliadoù ma vefe reiz ar skritur anezp. Mantruz !

---

Diwezad e teu er-mêz niverenn miz Kerdu FISELED GRONVEL. Va digarezit, med torret e oa ma roneo. Red eo bet din kas ma mekanig da Bariz.

---

Diviet eo ar "Grammaire bretonne". Tri den o-deus goulennet dija. Ma vez kavet 50 rakprener, e vo embannet a-nevez.

---



TRI LIZER

Le Ris, Ploare, DOUARNENEZ  
17.II.61

M. P. Mevel,  
Fondation Culturelle  
Brest

Monsieur et Cher compatriote,

Des amis m'écrivent que j'ai été l'objet d'attaques personnelles et répétées dans une publication périodique nommée FISELED GRONVEL. Le me semble que cette publication a reçu une subvention de la Fondation Culturelle en tant que "publication scolaire". Il m'est difficile de voir comment le caractère de publication scolaire peut se concilier avec le genre de propos dont j'ai été la cible. Je voudrais donc poser la question suivante : la Fondation Culturelle accepte-t-elle de subventionner une publication alors qu'une partie simplement de la publication (I) répond au caractère pour laquelle la subvention a été accordée ?

Je vous prie de croire, Monsieur et cher compatriote, à tous mes bons sentiments bretons,

PER DENEZ

888

(I) Gouezet vo ez eus eur "publication" euz Fiseled Gronvel !

AL LIAMM  
TIR NA NOG  
Kelaouenn vrezhonek  
Renner: Ronan HUON

"(Gwaremm ar Groaz"  
2, Venelle Poulbriquen Brest

(heb deiziad, med skrivet an 10.II.61)

Mignon ker

Ar pezh a lavarez war Fiseled a zo faos - Renner ar Vro ne oa ket e Logivi, hini Barr Heol kennebeut, hini Preder a OA e Kemper hag en deus komzet gant ar Prefed . Ar re yaouank a oa aet holl da Gemper. Chomet e oan va unan gant 2 pe 3 all ha n'hellet ket mont evit abeg pe abeg.

Te oar mat o-deus atao Keravel ha (I) Mevel ha Meaer tamallet din ! ! ! ? ? ober politikerezh ! ! A-hend-all ne oan ket bet pedet e Kemper ha ne cufen tra. Aet on en desped da bep tra ha daoust din bezañ ur paria da begañ skritelloù e-pad an deiz er Faou, e Loperhet, Rumengol, Hanveg da vare ar begadeg !

Arabat eo lavarout gevier ha treñkañ an traou a zo treñk a-walh dreist-holl pa vije tu da goupezañ anezho.

A galon genit memestra

Ronan

(I) N'eo ket abalamour ma 'z int krog da fiñval ha da gompren o-deus hen graet ataol er hohontrol.

J. ABASQ  
BREST

D'an 8 a viz Du

Kenvroad ker,

Setu en em gaved adarre Fiseled Groñvel. Plijadur am-eus ouz lenn dreist-oll ar pezh a lavarach enev "Ar re all". N'eo ket ma vofen a-du ganech bep tro: ho toare d'en em gemered eo a blij din. Ar re all a glemm diouzoch gand gerioù braz ha frazennoù troidellus. C'hwi a dag anezo gand ho tent lemm (dent eun dañvad doñv ?!)

Re galed ez eoh dezo, sur. N'ouzon ket bremañ peseurt labour a ra Engleo Breiz er skolioù. Mes a-hend-all ne welet ket kalz a dra o tond dioutañ. Hogen ar re all o-deus embannet n'ae (men dare) ped kazetenn ha leor. Kemend-all gounezet gand ar Brezoneg. Diêz eo d'eun ezel euz Engleo Breiz soñjal e teu koulz lavared oll ar pezh a lenn, diouz Al Liamm nemed Bleun Brug ha Fiseled Groñvel. (Ne gomprenan ket perag ne lezont ket a-gostez ar ZH milliget-se - pa ne ve ken evid gelloud kaoud eur gwennegig digand an Engleo.)

Er memez tro, m'ho-peus c'hoant rei eun taol pao all da Y. Olier, setu eun draig diwar-benn "Prizoniad ar Hackaz". Daoust ma oar ar Rusianeg war a leverer am-eus troet e istor diwar eun droidigez halleg, grêt fall a-walh, houmañ. Bez ez eus en e leor eur sotoni souezuz diwar goust-se: "reiñ a rejont gwerzh-butun d'ar mevel..." (e traoñ ar bajenn I5). Setu ar galleg: "les Tartares... donnèrent quelque commission au domestique", troet diwar ar Rusianeg: "Tatari poslali kouda-to rabotnika" (va doare-skriva, s g d g), dalavared eo: "An Dartared a gasas ar mevel d'eun tu bennag. Plijet en-dije an droidigez din gwellich m'en dije faziet er mod-mañ: "An Dartared a gasas ar mevel da gaohad"- Rag "kahad" a zo unan euz ar gerioù brezoneg evid "commission", ar pezh a ouzon abaoe ma klevis paotr va amezogez o vlejaj: "Maman, j'ai envie de faire la grande commission."

Kemend-mañ, evel just, n'eo nemed klask laou. Youenn Olier am-eus grêt eul labour talvouduz o trei an istor plijuz-se e brezoneg.

Eur gerig am-eus c'hoant staga ouz ar pezh a skrivoc'h diwar-benn ar "Brezoneg beo, gantañ c'hwez(h?) ar hagn.". Ar pezh a ra talvoudegez, buhez ar brezoneg, n'eos ket ar gerioù o-unan, med an ereadurez; enni eo emañ dalhet tro-spered ar Vretoned. Ar Brezoneg desket a lennom e kazetennou 'zo, n'eus brezoneg anezañ nemedaar gerioù (ha hoazé) ha ne rofen ket eur spillenn evitañ: eur yez estren ez eo e Breiz. George Orwell en-oa eur ger evitañ "Newspeak". Korv hag ene Breiz a zo e-barz ar Brezoneg beo. An dud desket a daol re a evez ouz ar gerioù, ha re nebeud ouz an ereadurez. Doñjer o-deus ouz ar gerioù galleg implijet bemdez gand ar goueriaded (eun oto, eun tracter, eur velo), nemed amprestet e vije bet ar gerioù-se e-doug a, Amzer Grenn ha dasmantret a-hed ar hantvedou. Hogen yezou all zo ha n'int ket bet ken pismiguz-se. Ar c'houer breizad a lavar: ar radio (ha n'eo ket ar...petra



dija ?); med ar memez ger a zo implijet ive gant ar  
Rusianed. Bez ez eus kals gerioù galleg hag a zo brezonek eged ar  
re kempennet gant an dud desket : "Mond a ra? emevex - mad-tre, eme  
c'hwi ( neuze oh Kerne pe Gall) - distaget, eme eun all" Ma! hemañ  
a zo eur gwir Breizad! "Sellit: ar ger "digarez!". "Diagrezit ahanon"  
a vez skrivet bremañ evid trei " excusez-moi". Hogen "digarez" ne  
dalvez evid " excuse" nemed gant ar ster "prétexte"(of "Desket da  
glask digarezioù") "Pardonit din" a zo brezonek eged " digarezit  
ahanon".

Ne gav ket din e vije ar wirionez penn da benn ganech. Kouls-  
koude, pe gavoh abeg d'ar frazenn " An dud a zo diseblant e-keñver  
ar brezoneg" (Diseblant eo ar ger ne blijfe ket din-me) Mez kaoud  
a ra din ar verb " a zo " a zo mad. Va mamm a lavar aliez " an dud  
a zo sod, er memez tra!" N'eo ket sur e verkfe " vez" ar boaz, mez  
al liez ober. cf " an dud a zo sod... an dud a vez paket (tapet) atao  
gant gerioù flour". Diouz Fiseled Groñvel eo e temnan eur skwer da  
zaoni ahanon : "Ar saout zo loened iskiz"

Setu distaget eun tamm lizer hir dech. Ne ouzon ket perag e skri-  
van anezañ; ober dech koll amzer. Ec: plijadur am-eus bet o renka  
frazennou "brezoneg bec" war ar pajennoù, tra ma klevan anezo a tre-  
gerni en va spered. Flêr ar hagn a oz ganto, n'eo ket gwir ? Med  
peb hini a zant c'hwez vad gant e gach.

Dech a greiz kalon;  
J. ABASQ.

---

Degemeret em-eus eul lizer all, digand an Itron de Bellaing,  
abaoe m'am-oa adskrivet an tri all uhellch. Sed amañ arroulennou  
anezañ :

"Gant souez em-eus lennet war ...Fiseled Groñvel" ..."Chomet e oa  
pennou braz Ar Vro, Barr-Hecl, Preder, h.a. da draillañ plouz e  
Logivi..."

Riskluz eo klask rei da gredi martezeadennoù. Hini ebed euz an dud  
meneget ganech ne oa e kamp Logivi....

...Eur mare 'zo e vez rebechet d'ar vrogarounien mond d'ober trouz  
er gouerioù folkloriel. Bremañ e vez rebechet outo chom hep mond!

Med, pa n'eur ket sur euz ar pezh a lavarar, eo gwelloc'h tevel.  
Al labour mad-kenañ a rit evid ar brezoneg en ho skol a dlefe be-  
zañ a-walh evidoh; e-leh klask tagañ ar re all hep prouenn ebed."

---

Souezet braz on bet o weloud eul lizer skrivet e galleg gant Per  
DENEZ, marteze n'eo ket "wan" da displega seurt menozioù ebrezoneg.  
Piou oar ?

Evel ma vez gouezet gant pep hini, ez eus dicu lodenn er Fiseled,  
ha ne vez implijet ar hant Englec Breiz nemed evid ar pezh a sell ouz  
ar skol. Med marteze ez eo bet diwanet e spered Per Danez eur c'hoant  
direiz : lakaad ahanon da chom hep barn ar skridoù iskiz a-walh, diêz  
da lonka, a vez embannet gant ar Zedacherion eur wech an amzer,  
Lavarar a ra ez eo "l'objet d'attaques personnelles et répétées".



Taget on bet evid ar wech kentañ er gelacuenn "OR YEZ", a-wel d'an oll en niverenn 13. miz kerzu 1960, hag e oa promesaet din "Beteg gweloud!". Komzet en-eus, e Fiseled Grouvel. diwar-cenn Per Denez, evid ar wech kentañ. en niverenn 1, miz gaver 1951. Ez-tre eo gweloud prou en-eus taget. Evidon n'an-eus grêt nemed respont, med, diouz a reot, e kavot.

Evid sklêraad an traou, sed amañ ar pezh a zo etre Per Denez ha mañ - E Aberstovez, e miz eost 1960, en-eus laret Per Denez din, mañ 'm-eus komprenet mad - da ar spi zo ganin am-eus komprenet a-dreuz-traou grevus-kentañ diwar-bonn enor eur henedi din. N'am-eus ket tabutet gantañ dre ma oan degemeret hegarad-tre e ti eur Brozad et da ehom du-hont.

Med, pa 'z on deut en-dro da Vreiz, en-eus kaset eul lizer da Ber Denez o houlenñ diskleriadurion resis digantañ. Respont ebed. Eul lizer all am-eus kaset dezaf, ha deut eo en-dro, heb boud bet digoret, hag erbedet. Hag abaoe e teu en-dro, bep miz, Fiseled Grouvel. Soñjal a ran en-eus ar gwir da houzaud ar wirionez, hag e houlenñ nan digand Per Denez respont ma lizer. D'an neb a lenno da varn.

Bez ez eus eur ger pouezus e lizer Huon "paria". Eur homplex an heskinerez a zo en em silet e meurtañ ar Zedacherion. Ferag ? ar hearn o-dea da lakaad ar re all a -du ganto, da lakaad an oll Vretoned da zedachaoua; hag e gwirionez o-dea ar gwir da gacud ar hoant-se.

Med eun dra dibosubl e oa, dre ma 'z eus pennou yen ha sirius e Breiz, memestra. Red e vefe da dud ar zh klask kompren n'on-eus kasoni ebed a-eneb dezoc; n'eo ket ni a rafe gand ar ger "enebourion" evel m'en-eus grêt "Ar Bed keltieg". Prest em d'en em unani evid brasa mad ar hezzoneg.

Evid an traou faos a hellfen embann, e vin laouen bepred da reizha anezo. Neuze, ne oa ket renerien Ar Vro ha Barr-Mecl. nag e Logivi nag e Kemper - hag e oa Abanna o komz gand ar Prefed. Doñjer am-eus ne oa ket ganin o tougen eur skrivitell. Plijadur am-ije bet o varvillad gantañ.

Eur wech hoaz, prest on da gompesa an traou, med e vefe red da gantañ da dud ar zh koll o homplex an heskinerez.

Evid pezh a sell ouz lizer an Ab. ABASQ, ne lirin nemed eun dra: a-du krenn on gantañ.

A. MERSER.